

c 375

CHANSON

POTRET PLOUILLAU

Var ton : *Adieu, Pontreo.*

- 1 M'am bije speret da gompren, evel a meus fantazi,
Me a vije n'em impliet da zonet da gomposi
Eur c'himiad leun a c'hlac'har, gret da gonscrivet
(yaouanq)
- 2 O deus tennet ar billet du ebars er blaves prezant.
Ebars er bla mil eis cant c'hoec'h, ar bemb a vis gueh-
E zeo digueet adare eus a baros Plouillau [golo,
Tud yaouanq evit an arme, tud deus an derrupla
Glac'haret eo oll ligne, p'o guelont o partiat.
- 3 Da partia gant an actif ne zeus quen nemet pévar;
Ervoanic Jacob, eus ar bourg, ha Guiljan Ar Meledar,
Ha Yannic Prat, eus ar Goajou, ha Pipi an Aveant
Pévar den eus ar re vrava, corfou caer ha tud vaillant.
- 4 Ervoanic Jacob a lare en deiz-se d'he gamarad :
Emâ a zo un devez trist hac a ra din calonad !
Guelet va mam baour o vouela, ha va zad qez desolet !
Va c'halonic ebars enr c'hreis zo dija casi ramnet.
- 5 Calz a sonchfe de, marteze, penos e ven eun poltron,
Em be aon rac eun ten fuzuil pe rac eur voulet canon
P'otramant aoun rac ar fatiq, o vale dre an hentchou,
Pe gousquet var eur guele can ebars er c'hordegardou.
- 6 Douguen va dillat var va chouq, va fuzuil ha va zabren,
Bale bemde a guér da guer dre ar fanq hac ar vouillen
Ha goude e fin va beac h rencout marteze campi,
Pe gousquet var an douar ien, pe otramant biouaqui.
- 7 Tor o deus an neb a sonch se ; ma c'haljent lenn em
Evit guelet va bolonje ha va inclination [c'halon
Ma na folse nemet va goad, me en scuilfe tout joaüs
Evit souten hon Impalaër, eun tad quer carantezuz !

c-3

- 8 Piou na gombatte quet hardi gant eun Impalaër christen;
Eur gaus quer just hac e hini a zo facil da souten,
Pa zomp memproù da Jesus-Christ, soudarded an Aviel
Bugale da Zoue an Tad, templou d'ar Speret-Santel.
- 9 Arça eta, camaradet, quen quitaad euz or c'houtre,
Demp ni da iliz Plouillau da supplia hon doue
D'hor preservidempus goalchans pa vezimp en armeou,
Ha da gousoli bars er guer hon tadou hag hon mamou.
- 10 Adieu dec'h, Autro sant Millau, patron euz ar barous-ma,
Adieu, queren ha mignonet cessit breman da vouela.
Pedit Doue hac ar Verc'hez da gavet soign ac'hanomp,
Hac hon Æl-mad d'or c'honduo partout elec'h ma ze-
[fomp.]
- 11 Adieu, va mab, va esperans, eme an tad desolet;
Piou a gousolo da dud paour goude ma vi partiet?
Pa vin accablet gan cozni, me vo clevet o laret:
Ma vije ma vap quez er guer, en dije va soulajet.
- 12 Clevit ar vam o quimiad ive digant he buguel:
Deus ama c'hoas, ma poqin eur vech quent eguet mervel,
Aben ma retorni d'ar guer, me vo ed euz ar bed-ma:
Deus ama etre va divrec'h evit ar voech diveza.
- 13 A guichen ar momet fatal, ma c'heus tennet, d'ar billet,
Bemnos vel ma fot di cousquet, me a seblant da velet
O tont eus eur gombat sanglant var eur chariot blesset,
Pe tolet en eun hospital, gant an oll abandonet.
- 14 Ar zoudard yaouanc contristet, c'hoas quen eguet partia
Evit essat o c'honsoli a lavar, en eur vouela:
Tavid, va zad ha va mam baour, ha bevit en esperans,
Doue; tad a visericord, a zo bras e brovidans.
- 15 Goude ma vo fin d'ar brezel ha goneet ar victoar,
Gant gras Doue hag ar Verc'hez, e vezo fin do clabar,
Evit merq eus hor vaillantis, gant lore deus hou tocou
Ni a zistroyo prest d'ar guer evit sec'hi o taélou.
- 16 Adieu da baros Plouillau ha de oll habitantet
Adieu d'hon oll anaoudeguez, ha queren ha mignonet,
Ha ma na memp quet ar boneur er bed-ma d'en em velet
Gras deomp ebars er barados assembles d'en em gavet.

(Propriété.)

Lanhuon, en ti intañvez Ar Goffic, levrer.